

MEURZH 15 A VIZ MAE MARDI 15 MAI

Ti Tachenn veurz **Maison des Associations**

6 Bali ar Gevredidi Cours des Alliés

20h30 8€ / 14€ Strollad
Troupe **AR VRO BAGAN**

GLENMOR DISUJ / L'INSOUMIS

Un abadenn c'hoariva, kan ha sonerezh. C'hoarierien, sonerien ha kanerien o kontañ buhez hag oberennoù Milig ar Skañv-Glenmor. War ar skramm-sinema e weler poltriji ha pennadoù filmoù. Piv oa Glenmor ? Penaos eo deut da vezañ un emsaver breizhat ? Ar bloavezhioù kentañ « o fritañ laou » asambles gant al livour Alan an Nost. Penaos en doa graet anaoudegezh gant Xavier Grall e Lokireg. Xavier Grall ha Glenmor gant an anvioù Arzel ha Glen daou haroz « Ar Fest-Noz » (Fête de Nuit) X. Grall. Penaos e voe savet ar gelaouenn La Nation Bretonne ganto. Marv Xavier Grall e 1982. Glenmor ha Fañch Bernard o vont da ganañ da Savoia. Glenmor ha Leo Ferre o kanañ e 1972. Glenmor e Bobino. Katell ha Glenmor. Glenmor o chom a-sav da ganañ evit gellout skrivañ romantoù. Glenmor er beurbadelezh. Klevet a reer meur a ganaouenn savet gantañ (Le Retour, Larmes d'un copain, 20 ans déjà, il se fit âne, Viviana, O Keltia, Groñvel, War hent Ker Dundee, D'un ugent a viz Gwengolo,...).

{Glenmor, l'Insoumis} est un hommage à Glenmor, barde breton et éveilleur de consciences. Il est interprété à la fois par des chanteurs et musiciens sous la direction de René Abjean, et des comédiens d'Ar Vro Bagan, le tout accompagné d'images vidéo. Musiciens et chanteurs interprètent un choix de chansons qui témoignent à la fois de l'engagement breton et universel de Glenmor et de sa sensibilité poétique. Les comédiens jouent des textes de Glenmor, de Xavier Grall, d'Alan Guel, de Katell, de différents témoins ayant côtoyé le barde. Ces textes mis en scène sous forme de dialogues, monologues permettent de le voir vivre au quotidien, de parler de sujets divers qui lui tiennent à cœur, de le voir dans ses tournées de chanson, dans son travail d'écriture, de réflexion. Sans suivre strictement la chronologie de sa vie, on le voit dans les épisodes marquants de son existence, dans ses rencontres avec Xavier Grall, Léo Ferré, Morvan Lebesque...

